

BREVED GWENN - MAE 2002

LODENN GENTAÑ : Istoer ha douaroniezh — 18 poent

Sujed : Japan, ur c'helloudegezh ekonomikel bed

I. Studial dielloù (8 poent)

Diell 1. Gelloudegezh Sony

“A-c’houde 1946, ar blez mah oa bet savet get un ijinour hag ur rakwelour* ispisializet er marketing, n’en deus ket arsavet* Sony a ijiniñ produioù ha marc’hadoù : ar radio tranzistor hezoug*, ar post tele liv trinitron kentañ, peotramant c’hoazh ar walkman, ar c’compact disc hag ar c’hameskop ment 8. Kemeret eo an akustumañs, hag evit derc’hel get ar ritm-se e talc’h Sony, blez àr-lerc’h blez, da c’hloestriñ* 6% a sifr e aferioù d’an imboure’h* ha d’an diorren, da lâret eo 10 miliard a lurioù e 1996, ur somm argant hañval doc’h budjed ar CNRS* !... ”

77 uzin, strewet rac’h dre ar bed, a bourvez* pep marc’had bras (Japan, Stadoù-Unanet, Europa).”

Hervez S. COURAGE, *Capital*, Goureneñv 1997

- rakwelour : *visionnaire*
- arsav : dihan, arrestiñ
- hezoug : *portable*
- gloestriñ : *consacrer*
- imboure’h : enklask, *recherche*
- CNRS : *Centre national de la recherche scientifique* e Frañs
- pourveziñ : *approvisionner*

Diell 3




Allo, Tokyo ? ‘Glevit ket, ‘d a ket rustaj an traoù, doc’h ar seblant !... a lâr an den doc’h ar pellgomzer.


II. Pennad arguzennaouet (10 poent)

Savit ur pennad ugent linennad bennak dezhoñ, ma tiskouezoc’h (get sikour an dielloù ha doc’h en em ziazeziñ àr ar pezh a ouiit) ema Japan ur c’helloudegezh ekonomikel bed, met unan hag he deus bevennoù (= harzoù).

Diell 2. Uzinioù brasañ Toyota dre ar bed



● Uzinioù brasañ Toyota er-maez a Japan

 Broioù ma kaver un uzin Toyota a-wael (= da nebeutañ)

Goulennoù

Ret eo deoc’h respont get ur frazennig seul gwezh. Ne vehe ket falloc’h deoc’h displeg hoc’h respontoù.

Diell 1

- 1- Sony a glask chom an hani kentañ er bed, en e dachenn. Menegit* 3 moaien implijet get ar gompagnunezh-mañ evit disoc’h* get ar pal-mañ. (1,5 poent)

Diell 2

- 2- E pezh rannvedoù* dreist-oll ema staliet Toyota ? Perak eno (pezh abegoù, pezh rezonioù, a zo da d-Toyota d’en em staliñ er c’hornadoù-se) ? (3,5 poent)


Dielloù 1,2, 3

- 3- Produioù a vro-Japan a gaver en-dro deomp, en hor buhez pemdeziek. Diskouezit ema gwir kement-mañ, doc’h en em ziazeziñ àr an dielloù. (3 foent)

- menegiñ : *mentionner*
- disoc’h get ur pal : *atteindre un but*
- rannved : rann ag ar bed, kornad bras ag ar bed, *région du monde*

EIL LODENN : Deskadurezh ar C'heodedour — 12 poent

Diell 1. Penaos eh a an ONU en-dro



Diell 2. Reter-Timor. Plegiñ a ra Jakarta dirak an ONU

Prezidant Indonezia a bleg d'ar gwaskoù* hag a asant ma vo kaset da Reter-Timor ur bagad soudarded etrevroadel renet get Aostralia. Un dra ne ouier ket c'hoazh : petra 'ray ar milisoù enep-dizalc'hour* o deus graet ar lazhadegoù*.

Prezidant Indonezia, Jusuf Habibie, en deus pleget d'ar gwaskoù etrevroadel, hag en doa disklêriet dec'h, dirak an tele, eh oa kontant Indonezia ma vehe bet kaset ur bagad soudarded etrevroadel da Reter Timor, evit "degas en-dro ar peoc'h hag ar surentez" eno. Meur a vro o deus embannet a-benn-kaer eh oa daet mat an diviz-mañ ; en o zouezh ema ar Stadoù-Unanet, Aostralia — hag a vo er renk kentañ e-mesk ar broioù a gaso soudarded da Reter-Timor — Breizh-Veur, Portugal ha Frañs ; daet mat eo ivez get an daou gomandour* pennañ e-mesk dizalc'hourion* Reter-Timor.

Indonezia he doa aheurtet*, e-pad ur sizhuniad pedost, da raviz* a zegemer ar bagad soudarded etrevroadel-se ; met pleget he deus 'benn ar fin d'ar gwaskoù kreñvoc'h pe kreñv ha d'ar c'hastizoù argant* kemeret enep dezhi get ar gumuniezh etrevroadel*, hag a zo lorc'het* doc'h danevelloù* ha skeudennoù an traoù spontus graet en drevadenn gozh-mañ da Bortugal get ar milisoù enep-dizalc'hour, sikouret get arme Indonezia.

Diferet* en doa an aotrou Habibie en en doa pellgomzet da gKofi Annan, sekretour meur ar Broioù Unanet, evit reiñ dezhoñ da ouiet eh oa prest Jakarta "da zegemer ur bagad etrevroadel evit ar peoc'h, unan graet a soudarded é tonet a vroioù amiet" da Indonezia. [...] Lâret mat en doa ivez eh oa "ret-groñs" lakaat fin an abretañ posupl d'an dizurzh a oa e Reter-Timor.

Ali Alatas, ministr an aferioù diavaez a Indonezia, a yay "a-benn-kaer" da New-York evit displeg soñj e vro dirak Kuzul surentez an ONU.

Diàr *Sud-Ouest*, 13 a Wenholoñ 1999

1. An Dolpadenn veur. Ema he sez e New-York. Ur vouezh en deus pep unan ag ar 185 Stad a zo ezel ag an ONU.
2. Ar C'huzul surentez. Ret eo d'ar Stadoù oll plegiñ d'e zivizoù.
3. Ar sekretour meur. Ne gemer ket perzh er votoù.
4. An organegoù* etrevroadel. Un daou-ugentad bennak a zo, en o zouezh :
HCR : sikour d'ar repuidi
UNICEF : gwarantñ ar vugale
UNESCO : sikour d'an deskiñ
FAO : harpiñ ar labour-douar
FMI : sikour stabilaat an ekonomiezh
AIEA : kontrolliñ an implij graet ag an nukleer
OMS : eveshaat doc'h ar yec'hed

organeg : *organisme*

gwask : *pression*
enep-dizalc'hour : *anti-indépendantiste*
lzhadeg : *massacre*
komandour : *dirigeant*
dizalc'hour : *indépendantiste*
aheurtiñ : *s'obstiner, s'entêter*
raviz : *rac'hin, refuser*
kastizoù argant : *sanctions financières*
ar gumuniezh etrevroadel : *la communauté internationale*
lorc'het doc'h : *horrifié à (l'écoute... la vue de...)*
danevell : *récit*
diferiñ : *indiquer, spécifier*

GOULENNOÙ (4 foent)

Diell 1

1- Pet Stad, ezel ag an ONU, a zo e-barzh ar C'huzul surentez ? (1 poent)

Diell 2

2- E pezh bro e hantera an ONU, hag evit ober petra (pezh palioù en deus) ? (2 boent)

Dielloù 1 ha 2

3- Pezh anv eo sekretour meur a-vremañ an ONU ? Get piv ema anvet ? (1 poent)



PENNAD ARGUZENNAOUE (8 Poent)

Savit ur pennad arguzennaouet 15 linennad bennak dezhoñ, ma tisplegoc'h petra a sinifi ar sigl ONU ; peseurt orin en deus an ONU ; petra eo e bal* pennañ ; c'hwi 'lâro penaos ema aozet, ha c'hwi a gomzo ag arwezioù* disort* e obererezh dre ar bed (= c'hwi a gomzo a dout an traoù a bep sort a ra an ONU un tammig e pep lec'h dre ar bed).

pal : *objectif, but*

arwezioù disort : *différents aspects*

TEIRVET LODENN : Lec'hiiñ er spas hag en amzer — 6 poent



1. Klokait an daolenn amañ edan, en ur verchiñ doc'h pezh niverenn — lec'hiet a-dreist ar rizenn-amzer — e tegouezh pep unan ag an degouezhadennoù-mañ :

Degouezhadenn	Niverenn
Kantvezad Napoleon I ^{an} ha Napoleon III	
Hitler kanseller	
Deroù (penn kentañ) ar gristeniezh	
Dispac'hoù rus	
Kantvezad Sant-Loeiz	
Kantvezad Loeiz XIV	

2. Roit o anv :

d'ar c'hêrioù ma raer un arrest, a-hed ar veaj-mañ en-dro d'ar bed :

1 =

2 =

3 =

4 =

d'ar c'hevandirioù, d'ar meurvorioù ha d'ar morioù a nijer a-dreiste :

5 =

6 =

7 =

8 =

